

Gwenole.

Parrouz Tonquedec

Da Zant Gwenole

War don: **Bale Arzur**

Diskan

Zant Gwenole, zant braz hon bro
'Jilaouet ouz hon pedenno
Hag a efom holl d'ann Envo.

He dad pinvik, niz roue Breiz,
Oa kristen mad ha leun a feiz
Deuz a Vro-zoz 'vel zent eleiz.

Fragan ha Gwenn oa he bried
Deuz eul iestr kaer zo diskennet
Enn enezen Briat hanvet.

Eur barrouzik, deuz ar c'hoantan,
N'euz hano Fragan er vro-man
Tost da Zant-Briek Ploufragan.

'N Eskopti Kemper 'man Ploegwen;
Ar Batronez eo zantez Wen
Vo meulet eno da viken.

'Rog ma oe ganet Gwenole
Gwenn nevoa daou a vugale:
Gwethenok, Jakut, zent ive.

'Otro Dæe, 'me 'nn daou bried,
Ar bugel-man vo hon zrivet
Hag a vo d'hae 'hina teurveet.

9. Jossan Rouquin.
St Gwen n'est pas
la patronne de cette
paroisse, — il n'y a
autre Vailleur de
diocèse —

Koant 'vel eunn cel, leun a furnez,
Bemde a kresk en zantelez,
Penez quitât ar bugel kez?

Gant Fragan eunn de tigoeaz
Evel gant Saul, war hent Damas,
Eun tarz kurun enn diskaraz.

Gwenole oar gwestl he gerent;
Pedet a neuz 'vel ped ar zent
Pa deu c'hoant d'he mont d'ar gouent.

D'hac'h, ma Doue, eme Fragan,
Ma holl vugale a westlan
Ha Gwenn ha me, 'daleg breman.

Darn a lavar da Gaourentin
Oe gand he dad kaset mibin
Zant Gwenole deuz ar mintin.

Herve darn-all, da Enez c'hlaz
Fragan, Gwenole a gasaz
'Lec'h ma oa Budok eur zant braz.

N'euz fors enn pebez manati!
Gwelet oe tomoc'h, o pidi,
Ar c'halono tost d'he hini.

Kanan meulodi da Doue
Chetu plijadur Gwenole
'Vel ober skol d'ar vugale.

'Nn ti ar paour klanv a ve kavet
Hed ann noz, 'we, o, daoulinet
O c'houlenn 'vithan ar iec'hel.

Neb gar Doue ra' vel neuz e' hoant.
Galloud Doue zo tra eur zant;
N' euz ezom nag aour nag arc'hant.

Piou a larfe ar burzudo
Grêt gant Gwenole enn hon bro!
Dre holl ho c'hade enn hincho.

He c'hoar Kreirvi gand eul loen fall
A zo lakeet hanter-dall
Hag he breur he fare raktal.

Er gear a Is petra neve
Enn eur stourm enn ti ar Roue?
Eun den a gollaz he vue.

Gand zin ar groaz, enn he gerc'hen,
Gwenole lavar eur beden
An den maro zo beo zouden.

Eur potrik kez zo bet flemmet
Gand eunn ær-wiber bulumet;
Gwenole n' euz hen iac'heet.

Deuz Ennez Siziñ e teuaz,
Ha' dreuz ar mor, war he dreid noaz.
A valec' vel nneur prad glaz.

Zantka burentin hen grabetek
Hag Abad e Landevennek
Gant pebez neuz e oar prezek!

Er miz Eost ann dad oa nee' liet,
Rag dour d'evan, n'ho devea ket;
Kenkent eur funten a c'hoar...

O vont enn hent e kav peovien
A c'houl diganthan aluzen,
Hag hen ra d'he eur brezegen.

Wel eo d'imp arc'hant 'vit kômzo
Lar eun didâlvez deuz ar vro;
Ha Gwénole da skuil daero.

'Vit ober kentel d'ann den fall
Ar zant a dosta d'eur paour dall
Hag heman wel skler 'vel eunn all.

Prinsez Dahutmerc'h digalon
Oa kroaz ar Roué mad Grallon,
Dre-zé na devo ket pardon,

Er gear a Is gandann holl dud;
Ann dra-ze n'euz gret kalz a vrud,
Oe beuet ar brinsez Dahut.

Grallon'vad, drugare Doue,
A chomaz ganthan he vue
Dre m'oa mignon zant Gwenole.

Karomp Doue ha zent ar vro;
Ha pa vo arriar maro
Ni ielo ganthe d'ann Envo.

Imprimatur

Brioci, die 21 Januarii 1890

A. Lutourg Vic. cap.

*A. Le Courneur
beleg.*